

Dastumad Pennwern : dornskrid 89

69. ME MEUS CHOAZET EVID MESTREZ

(follennoù 217 - 218)

Me meus choazet evid mestres
eur plac'hik koant divar ar mes.

Mes allas siwas dam c'halon
Chenchet en deus a opinion

- Va mestres koant, ne vouien ket
o poa va dilezet ken abred.

C'houi o c'heus ambuzet va fortun
Koulz e vichen chomet eb nikun.

- Me ne meus ket ho fortun ambuzet
Na fortun den iaouank e bed.

Oblijet he beb kraouadur
Da klasq e vad en avantur.

Ken all louarn ken ar c'had
pepini zo oblijet da klasq e vad.

Neket en dispigner da vadou
Nag en redet dan tavarniou.

Mar (gevan) me gwin ag e ran
Arc'hant e meus a (pea e ran)

Deus kement skoden e meus gret
A netra tout noc'h ked klasket.

Me meus var va leur trivarc'h bern ed
A c'houi va mestres no c'heus ket.

Me meus em c'hraou trivac'h bioc'h lez
A c'houi no c'heus nikun va mestres.

Me ia beb nos goude va c'hoan
Da vellet va mestres va c'hunan

Da konta deñ va sentiment
Gouzout he hini a meus c'hoant.

- 182 -

Pa meus va sentiment deñ kontet
e deveus dime respontet

e karien mad ar gwin kleret.

- Va mignon, klevet a meus laret
e karit mad ar gwin kleret,

ar gwin ardant a zo d'ho goud
Foëta ho mado a rid tout.

Mar gevan me gwin ag e ran
arc'hant a meus a pea e ran.

~~~~~  
vvvvvvv

Jannet Puill 19 janv. 1851

~~~~~  
vvvvvvvvvvvvv